

# AVENTURIOU

Daou den yaouank eus a ganton Callac

Ar plac'h marvet gant ran galon

TON ANAVEZKT.

Ma vije bet ar furnez, an nevoa Salomon,  
A eur speret da rima vel ar gwir Cicéron,  
A talanchou Josue, Moïsez a César,  
Moa composet eur chanson a so leun a c'hlae'har.

Moa composet eur chanson, skrivet gant ma daerou,  
Var sujet eur bromese toret gant gwel deodou,  
Kent vit avans davantañ, fel din nom adressi,  
Da Roue ar firmamant so hanvet ar Messy.

Breman eta va Jezuz, va Salver souveren,  
Me o ped a wir galon d'exausi ma feden,  
Astennit var ma fluen, ho torn madelezus,  
Evi ma c'hellin scriva va buez malevrus.

Kenta moa bet an henor da velet va mestres,  
Oa da daouzek a viz mae, e pardon Sant-Serves,  
Eur c'houlaoquen en he dorn bars er prosision,  
Charni rez ma santimant, ag ive va c'halon.

Neur dont d'he c'honsideri, va c'halon a dride,  
Vel ma reont en envou ar sent ag a clez,  
A me o venet neuze gant Karante sinser,  
Da saludi anezhi, dre gomzou saluter.

Me ho salud plac'h yaouank, rouanez ar guenet,  
C'hui renfe din an enor a ne veritan ket,  
D'antren n'ho compagnunez, me meuz dezir ardent,  
Mar deut breman d'am refus c'hui am grai languisant.

Hi a respontas dime ebars e ber gomzou,  
Me non ket deut aman da vale henoriou,  
Da roula ma iaouankis, me so deut, den yaouank,  
Da heuill ho compagnunez, me so meurbet contant.

— 6 —

Neuze nimp e vont hon daou, dre gwir eur garante,  
Gant plijadur asables, da zevel amitie,  
Laket e moam hor speret da formi eur chaden,  
Vit beza victorius var hon enebourien.

Bars an amour mutuel, nimp a oa antreet,  
Dre artifisou Venuz hor chaden a momp gret,  
Hor e'harante a greske da heuil hor secrejou,  
Mes an amzer breskrivet, rez fin d'hor prepojou.

Araog dont da guidadi an eil eus eguile,  
Me o e'houlen digant hi eur merk a amitie,  
Ag hi o levaret din, va servijer fidel,  
Cotu aze eus va dorn eur mouchouar godel.

A so fleüriet gant amour, bordet gant amitie,  
Model deus ma flijadur, test deus va e'harante,  
Neuze retorniz d'ar gaer gant eur galon gontant,  
Pa oa ganin em godel mouchouar va dous coant.

Tremen a ren an amzer, gant amour o veva,  
E sonjal em e'harrante, Marie Augustina,  
Dre ma neus ket man prinsez na rouanes,  
Da gaout an talanchou vel ma neus va mestres.

Ag he bisach so henvel eus un aël ar e'haera,  
Ag e e'horf so imach demeure ar re vrava,  
Oll astrou ar firmamant a loar ag steret,  
A golfe ho sclerijen, ma vefe kurunet.

Eur bloavez omp bet om daou ober amouroustet,  
Neuze lakchomp un termen da veza uniset,  
Da wel Marie anter eost, lakchomp hor santimant,  
Da vont dirag ar Vere'herz, da ober hor sermant.

Ebars en ilis Bulat eur plas ar santella,  
Kemeret vit testini hor mam an tenera,  
E neur antren en ilis stouechomp d'an daoulin,  
Vit ober hor promesse dirag hor mam divin.

He dornik flour em lini, unanet hor e'halonou,  
Gant gwir garante d'an env savet or pedenou,  
Vit goulen digant Marie grasou particulier,  
A digant Roue ar gloar hor mest ag hor Salver.

Pa meamp gret hor promesse aimp o tonet er maez,  
Ag hor e'halonou laouen karget a levenez,  
Henvel demeure kaptivet laket n'ho liberte,  
Goude beza exilet, entro pad ho bue.



— 7 —

Hi neuze a laras din, breman va servijer,  
 Eo poent demnin kimiadi, a mont ive d'ar gaer,  
 Évit anons d'hor c'herent penaos meump esperans,  
 Da antren en unioñ, a d'ober alians.

O! Pa oan e kiniadi an eil ous egile,  
 Sonjemp digant hor c'herent kavet hor liberte,  
 Mes tromplet omp bet sioas e n'hor fretantion,  
 Roet deus bet demp pikou, da piket or c'halon.

Pa oan ebars em gwele e kemor ma repos,  
 Me o klevet un eostik vardro anter nos,  
 Pehini lavare din ken fasil dre he iez,  
 Da vestres so den yaouank, bars e tristedigez.

Évit klevet an eostik ne moa ket ar greden,  
 Mije eur groas ken pouner or bed man da zouguen,  
 Coulscoude honas, a oa ma flandou galet,  
 Lennet dinme eus an env, dre iez al lapouset.

Neuze oan bet o veva, ia! epad tri devez,  
 Gant glac'har bras a chagrin e sonjal em mestres,  
 Ne oan ket evit repos na debri n'ag eva,  
 Kent a mije bet gwelet, Marie Augustina.

Goude me vont de gwelet, d'ad termen asinet,  
 A pa welis anezhi me oa ol glac'haret,  
 An daelou n'he daoulagat, he mouez anter troc'het.  
 Ag hi vel un den maro a bet en he archet.

Allas gant an tourmanchou, he speret oa troublet.  
 He bisach gant ar glac'har oa meurbet dislivet,  
 He c'halon a oa mantret, dre nez an ankeniou,  
 Ma teuas da laret din beuzet en hen daerou.

Jean gaës va muia karet ranet kant eo va c'halon,  
 Boc meus klevet va setans, va c'hondaonation,  
 Prononcet din gant va zad kruel a dinatur,  
 Mui e zilaou ar gwel deod, evit he grouadur.

Dre gomzou malisius a zellou diremet,  
 Neus laret din birviken ne vijen unisel,  
 Pa n'ellan o posedi, aman var an douar,  
 E finisso va bue, breman var an douar.

Cri a vije ar galon a chomje ep gwela,  
 Ebars en heret Bulat, de zul ar rosera,  
 E welet va mestrezik teplori var ar be,  
 Leac'h ma oa he zadou koz bet galvez gant Doue,

— 8 —

Allas, kals bras a zaerou a deus eno scuillet,  
Ar pinsin var be he zud, a deus bet rempliset,  
Bars en traouien Josaphat devez ar jujamant,  
Vo ket muioc'h a c'hlae'har, n'ag a zaerou sanglant.

Vit a oa ganemp on daou, eno e kimiadi,  
Ebars e beret Bulat rankout nem separi,  
Ar goad en hor goaziet a so deut do frimā,  
Ag or c'halonou tener a so deut da ranna.

Ben pemzek devez goude, e klevis ar c'helou,  
Penaos e eo va mestres var gwele ar maro,  
Pronons a rez va hano e neur guitad ar bed,  
Neur laret kenavo Jean, e Pales an Drindet.

Pa eo maro va mestres, ma dous, va c'harante,  
Me ielo d'eur ermitach, betek fin va bue,  
Eno me rai penijen betek fin va deiou,  
Esperout c'hoas e gwelet, e pales ar joaiou.

*(Propriété réservée)*

